

(367, suite)

Var ton :

Neus get pell em boa prouvet da Lauranç ar Merer
 Ha sclër,
 Neus get pell em boa prouvet da Lauranç ar Merer
 Voa qer digor e c'henou, faladeliron, faladelina,
 Voa qer digor e c'henou ha laouar ar Guër-Gaer. (1)

Hirio e zân da brouvi c'hoas divar va zorchen,
 D'al loën,
 Hirio e zân da brouvi c'hoas divar va sorchen,
 Eo hirroc'h e ziouscouarn, fala, &c.
 Eo hirroc'h e ziouscouarn equet lost an argen.

Seul vui en deus c'hoant, Lauranç da zisqeus e speret,
 D'ar bed,

(368)

Seulvui en deus c'hoant Loranç da zisqeus e speret;
 Sell sclerroc'h, ha prou d'an oll, fala, &c.
 Sell sclerroc'h [h]a brou d'an oll a dle bea staguet.

Hanval ouz ur paour qeaz a zo coelet en ur bern coc'h,
 Buoc'h

Hanval ouz ur paour qeaz a zo coelet en ur bern coc'h,
 Pehini, o clasq sevel, fala, &c.
 Pehini, o clasq sevel, en em vastar muioc'h.

Foeltr chanç nateus, va mignon, ouzout emeus true,
 Ma fe,

Foeltr chanç nateus, va mignon, ouzout emeus true,
 Avoalc'h voa coll da vutun, fala, &c. (2)
 Avoalc'h voa coll da vutun; coll da benn a zo re.

(1). - [Il y a un renvoi (1); mais Lédan a oublié d'écrire la note.]

(2). - Collet en devoa e zebil butun.

454

Ha gouir eo e poa scifet deus an arme lizer,
 D'ar quër;
 Ha gouir eo e poa scifet deus an arme lizer,
 Datet demeus ar bempet, fala, &c.
 Datet demeus ar bempet ha triëgont a c'hoerrez.

(369)

Evelse lar un histor debitet gant tud fur
 Assur;
 Evelse lar un histor debitet gant tud fur,
 Pere neus ar greden ferm, fala, &c.
 Pere neus ar greden ferm out arzen dre natur.

N'ouzön na lenn na scrifa; mes dre ma zoun potr lem
 Hem! hem!
 N'ouzoun na lenn na scrifa, mes dre ma zoun potr lem,
 As piqin gant ma noade, fala, &c.
 As piqin gant ma noade gen a deui da glem.

Roet moa dit un avis da renonç da ganän
 than!
 Roet moa dit un avis da renonç da ganän;
 Mes re vad eo ar vicher, fala, &c.
 Mes re vad eo ar vicher, me zalc'ho da rimän.

Dre ma zo din prometet ur pezh uquent real,
 Ractal,
 Dre ma zo din prometet ur pezh uquent real,
 M'es lardo, ha me scoo, fala, &c.
 Mea lardo, ha da scoo varroud vel un den dall.

(370)

Mar dout bet dindan Charles, general pe soudart,
 Bavart,
 Mar dout bet dindan Charles, general pe soudart,
 Me meus ouspen combatet, fala, &c.
 Me meus ouspen combatet e quichen Bonapart.

Pa po c'hoant da gomposi ha da c'honit arc'hant,
 Coant, coant,
 Pa po c'hoant da gomposi ha da c'honit arc'hant,
 Na gommanç gen da sonniou, falla, &c.
 Na gommanç gen da sonniou vel an dud ignorant.

Laret e vo did bepret e vi ur quenaouec,
 N'as bec,
 Laret e vo did bepret e vi ur quinaouec,
 Ma na chenches a feçon, fala, &c.
 Ma na chenches a feçon, imbecil Sant-Inec.

(371) Un heol hep sclêrijen naneo foelt seurt abet,
 Me gred,
 Un heaul hep sclêrijen naneo foelt seurt abet,
 Nac ur c'homposer soniou, fala, &c..
 Nac ur c'homposer soniou a zo paour a speret.

N'en deo get avoalc'h rima comzou hep penn, na rêr,
 Merer;
 Ha neo get avoalc'h rima comzou hep penn na rêr;
 Ret eo ober dê pega evel, fala, &c.
 Ret eo ober dê pega evel cod var baper.

An den innocant avoalc'h evit parlant var treo,
 Te gleo?
 An den innocant avoalc'h evit parlant var treo
 Pere ne gompreno get, fala, &c.
 Pere ne gompreno get, va c'hredit sot pe meo.

Gement tra a gomposes zo grêt var ar scabel,
 Huel
 (372) Gement tra a gomposes zo grêt var ar scabel,
 Deus an orgouill ar sota, fala, &c.
 Deus an orgouill ar sota an oll en goar en goël.

Na c'heus disget, emedout, nemet bea christen,
 Hepgen,
 Na c'heus disget, emedout, nemet bea christen;
 An diaoul ta voa da vestr, fala, &c.
 An diaoul ta voa da vestr, pe n'en don get un den.

C'hoant a c'heus bet da brouvi e vouies da Baten,
 Caer, caer,
 C'hoant e c'heus bet da brouvi e vouies da Baten;
 Hac ec'h eus prouvet control, fala &c.
 Hac ec'h eus prouvet control, coach, coach, coach, coach da rêr.

456

Da setançon zo tennet, hervez a meus clêvet
Laret,

Da setançon zo tennet, hervez a meus clêvet,
Deus lizer a ras sant paul, fala, &c.
Deus lizer a ras sant paul vit an innocentet.

Ploueneve a zavo did ur statu marbr quenn flour,
Entour,

(373)

Plounevez a savo did ur statu marbr quenn flour,
Mar marvez, vel en creder, fala, &c.
Mar marvez, vel mén creder, goude ur c'horfad dour.

Evelse eo decidet gant ar gonsaillerien,
A grenn,

Evelse eo decidet gant ar gonsaillerien,
Ar statu a vo poset, fala, &c.
Ar statu a vo poset var ur boud bariqen.

En e zorn clei vo 'n drompill, digor vo e c'henou,
Ho! ho!

En e zorn clei vo 'n drompill, digor vo e c'henou,
En e zorn deo ur chopin toul, fala, &c.
En e zorn deo ur chopin toul, var e benn ur sako.

Enor ha gloar did, Loranç, ha da dud da baros,
Tud lous;

Enor ha gloar did, Loranç, ha da dud da barous;
Pequey bras ervo quelet, fala, &c.
Pequey bras ervo quelet en tour da faç marmous!

(374)

Me sonch emeus gouneet peadra da gaout coan,
Gant poan!

Me sonch emeus gouneet peadra da gaout coan,
Demp eta prim da gana, fala, &c.
Demp eta prim da gana ar son da dy Alan (1).

Fin.

(Vol. II, p. 367-374.)

25 str. numérotées: la dern. porte le n° 27, en
réalité c'est le n° 25.

(1). - An Tenzorier.